

KIS-874 – E sigur saviadoù

(GE da YBAN – 08 05 06)

E ’m respont dit eus Meurzh-Ebrel¹ e tremenen eus kudenn an amprestañ d’ur sell ledan war hon saviad hag hon labour ; an dezrann a glasken ober oa a-benn ar fin hini *Gwalarn* an deroù (a-raok 1930), rak ar pezh a reomp n’en deus ster nemet evel kendalc’h ar c’herzhed etrezek an dremmwel eskoret neuze. Un istorour, o heuliañ kammedoù Roparz HEMON, a lakafe war wel rikladurioù damkanel an hini a skrive e 1924 : “Sevel ul lennegezh distag diouzh lennegezh ar werin. [...] Yezh nevez-flamm Breizh-Izel, eeun ha glan, kentoc’h eget yezhoù kozh ar bed e c’hellez ober labour ar wirionez²”, hag e 1951 a alie ar skrivagnerion da dreiñ ouzh ar parlantoù³. Notañ a rafe e wele Roparz HEMON er brezhoneg un devoud lennegel kent pep tra hag e pellae diouzh brezhoneg ar werin er feur ma venne pellaat diouzh lennegezh ar werin. Alese ar sell diasavek a daole war an daou idiom p’en dije ur sell dialuskek diskouezet edo yezh ar werin oc’h ober he zalaroù hag ar “yezh nevez flamm” o tougen chañs nemeti ar brezhoneg da gaout un dazont. Bezet pe vezet, gant c’hwelad dibenn ar bloavezhioù ugent⁴ e kemere Roparz HEMON penn un hent dall damkanel a ranke a-gantrevn e gas da reiñ an erlev da “imboudañ barroù ar Parlant war gef start ar Yezh C’hlan” ; erlev hemañ na heulias ket e unan, rak mard oa da vezañ addigoret chanter ar yezhourion gent — ar Gruzoed o doa trevellet e-doug tri c’hantved evit ezvourzhañ en o enezenn pinvidigezhioù al lestr peñseet —, mar chome c’hoazh teñzorioù da dennañ eus kouc’h ar parlantoù sanket er morfank, e klasker en aner ur roud eus ar re-mañ en oberoù ar skrivagner.

¹ Sl. La-17 320-327.

² *Breiz Atao*, Meurzh 1924 [sl. *Ur Breizhad oc’h adkavout Breizh*, eil emb. 1972, 50-52]. Hervez a gontas din Youenn DREZEN, “ne ’m eus ket amzer da goll !” a responte Roparz HEMON da zisplegañ perak ez ae e galleg d’e vatezh kozh.

³ Sl. *Al Liamm*, niv. 26, 1951, 36-41 ; sl. ivez La-17 61-62.

⁴ Sl. La-16 177-178.

E dehentadur Roparz HEMON ha, dre vras, hon diaraogerion e rankomp lakaat e penn kont an dic'hallus e oa da vrezhoneg ar bloavezhioù pergont-c'hwegont bezañ yezh a gedvuhez. Gant *Gwalarn* he doa al lennegezh diraezet he oad gour. Nemet edo pell ar “yezh nevez flamm” a vezañ kuitaet he mailhuroù, re ouezel ma oa c'hoazh evit bevañ dindan amzer vras ar vuhez voutin. An diac'hinad-se ne voe ket anat diouzhtu, dre ma voe kantet brezhoneg ar bloavezhioù pergont ha pemont e roll idiom ur geto.

Ha brasoc'h eo deuet chañs ar brezhoneg da vezañ yezh ur gevredigezh ? Un diforc'h a bouez ez eus bepred : d'he zro eo degouezhet ar yezh en he oad gour. He staelad a yezh vev n'eo ket mui da lakaat en argraf. Perzh reol a gemer ar vrezhonegerion hiziv en ur gevredigezh ordinal — pep hini ken dizalc'h diouzh ar re all a-fet speredegezh, stuzegezh, bedouriezh, engouestladurioù ha ma vez annezidi nep keoded kempred ; poent boutin nemetañ etrezo, ar yezh evel organ retvezek o buhez — retvezek, eleze arempredus d'o rezid ha n'eo ket kabestrus dezhañ. Gant dedroadur ar saviad e Breizh ez eus da c'hortoz ma vo dalc'het kont kevredigezhel ha politikel eus o yezh en he retvez buhezel — dezho neuze da virout nad ay ar gont-se e-maez amgant an deberzh.

Hiziv e paota an aozadurioù mennet da frammañ, da reoliñ, da gorvoiñ bountad an dud a garfe gouestlañ poan hag amzer d'ar brezhoneg. Hini anezho avat ne vez chalet da ziazezañ war un dezrann istorel, ha grevus eo. E se, da skouer, e tiheñcher miliadoù a vugale dre ginnig dezho evel brezhoneg meskailhezoù na ouijent nemet mougañ o spered mard agent d'o yezh. Ha levezon Roparz HEMON a ve da damall ? Kantratoc'h eo gwelout eno un devoud bredkevredadel a anvfen an ersav mezhek ouzh ar vezh. Goude gouzañv un istor a faezhidi, ur gedvuhez a zispriz, ul lavar diskaret, e sav Breizhiz ar faezhidigezh, an dispriz hag an diskar evel bannieloù hag e tennont klod anezho. Krouer *Gwalarn*, goude klask digeriñ hent digenvez “ar wirionez enep d'ar bed”, a ve distro davet e vreudeur evit rannañ ganto o mez h evel ma sammer ur groaz... Mar klever hiziv e genoù saverion bannieloù ar vezh an hevelep gerioù pe dost hag e prepozioù an eil Roparz

HEMON⁵, n'eo nemet kendegouezh, dre berzh an unpreder a ren en hentoù dall.

⁵ Keñveriañ meno Roparz HEMON er bloavezhioù c'hwegont : “Diwar 10 ger eus SADED ez eus 9 re” ha gwehentañ dec'h-houezour ar C'huzul Ranndir da Ofis ar brezhoneg hevlene : “Gerioù a-walc'h zo e brezhoneg evit lavarout pep tra.”